

- 145 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

54. PEDER MALHEUR

( follennoù 177 - 180 )

M'he ho suppli, Speret Santel  
 Da reï dam speret an allumier  
 Da ziskleria dar Vretoned  
 Pevar malheur zo arriet

Pevar malheur (trouzus bras)  
 Ma nen deveus klevet den biskoas.  
 An tad, ar vam a zo beuzet.  
 Ar bugale a zo lazet.

Eun ozac'h, ar blave tremenet,  
 Oroll a spont eo da klevet  
 En eum lakan da zivoada  
 Eur pemoc'h en devoa ho larda

A pa voa gantan kempenet  
 De labour eo bet sortiet  
 De labour evel peb hini  
 he vugale a chomas en ti.

Eur c'hraoadur a voa eno  
 enn oad a eïz pe a no  
 hag en deveus bed remerket  
 Penos voa ar pemoc'h kempenet.

Evel va zeed e tad sortiet  
 En eur gontel eo bed kroget  
 Laza he vreur en deveus chonjet.

Pa voa e vont da zigeri  
 e santas e dad entren en ti.  
 En a ia buhan da lavaret  
 Va zad, va breur a meus lazet.

En e galon an uanad  
An daelou en he daoulagad  
/en eur/° vas e zeo bet kroget  
gant eun tol vas en he lazas  
Dan douar en neus en pillet  
en he c'hood en deus en beuzet  
e lec'h souffr gant patientet  
e zeo evel eun entrelachet.

°a-us : eb  
 biskoas a  
 erreur

Neuze<sup>c</sup> kemeras eur fals testeni<sup>°°</sup>  
O chongal mond er mor da veuzi

° a-us : h  
 °° a-us :

Gant an ent pa voa e vonnet  
 e briet en deus rencontret

Pelec'h e zit-tu va briet  
 Meurbet o kavan kontristet  
 - Mont a ran duman en eur bale  
 c'hui tristaio ive eb tale.

Ar vreg neuze a retornas  
 guir e bed ken a lavaras

En ti evel ma zeo entreet,  
 Dan douar ractal e zeo simplet  
 e velet leur an ti ruchet  
 Gant goad e hinnoçanted.

Non penos ar c'hreg na varvas  
a c'hoas e devoa ar gourach  
evel ma ze bed dissimplet  
var lec'h e bried e retornet  
Da reddeg var lec'h e vriet  
O chonjal klevet ar chujet

E bord ar mor pa erruas  
 e veuzi en remerkas  
 (nac - hi ne kemeras ket nec'hamant)  
 hag hi mont digomplimant  
 lamet er mor eb damant.

## - 147 -

O chonjal souten he bried  
 Allas o daou e zint beuzet  
 Tud ar c'hontre zo estonnet  
 Goëlet an ti abandonnet.

----

E vellet en eur pennad derves  
 distruja tud eun tiegez.

----

Tadou a mammou me o ped  
 A c'houi mistri a mestrezet  
 Na roët ket re a liberte  
 pa na chomet er ger gante.  
N'ho lezet ket re en ho roll  
Pa na chomit er ger d'ho diwoël

Gant an tan pe mer a feçon  
 Pa vezont lezet en abandon  
 Dibot a vech na erru goall  
 Pa na chom o zud do diwall.

-----  
VVVVVVVV

Jannet Puill 14 janvier 1851

-----  
VVVVVVVVVVVV